



inconnue d'Ollivier

GUERZ

AN

ITRON - VARIA A C'HLAC'HAR

Oar eun ton trist.

Guerc'hes Glorius Vari, queit ag a vin 'n bue,
Pedet 'r Speret-Santel d'am assistan bemde,
Da garet, da servijan ho Mab gant dilijans
Hag en heur deus ma maro cavet ho assistans.

Pa oa anoncet din-me vijen Mamm eun Doue,
Me recevas eur joa vras em c'horf hag em ine ;
Mes eur feuteun a c'hlac'har n'em c'halon a savas
Hag en durant da nao mis biquen na disec'has.

Pa oa arru 'n amzer d'en digas voar ar bed,
En touez ma adversourien me oa gantan rentet ;
Eis dez goude m'oa ganet commansas scuil he voad
Vit prena 'r bec'herien hag apaisi he dad.

Iherodes pa neus guelet a neus bet ordrenet
A vije hep complimant ar vugale lac'het,
A vije hep complimant lac'het ar vugale,
Hac a neus bet ordrenet lac'han Mabic Doue.

Eun El deus an envo a zo bet disquennet
Zo disquennet ne c'hichen a neus dei laret :
Quitæet gant ho Map ar guer a Nazaret,
Ha groet eta quemmen-se buana ma c'helfet.

A boe an noad a dregont vla a neus ma c'huitaed
D' vont creiz ma adversourien da brezec er bed.
Dez guel ar Mintin golo teuas lan d'he c'havet
Hac quasi e noas divisquet a neus dei laret :

Mari c'hui eo ma glac'har ! Ho Map zo quemeret
Hag 'vel d'eur criminal gant ar Judevien trefet.
Parrujont d'en guelec oa pignet er menez,
E creis etre daou voler, vit ma coñje e vuez.

He guic a oa dispennet gante a dolio fouet ;
Honez a zo eur galonad, Mari, Mamm glac'haret !
Disquennet, ma Map Jesus, disquennet deus ho croas,
Disquennet oar ma barlen vit ho c'hambrasin c'hoas.

Hones so eur baourante, ma Buguel, a peus bet :
Oar an teil e zoc'h ganet hac en eur groas marvet !
Oll sperejou evurus, Ele deus an envo,
Mar bijac'h var eur c'halvar c'hober ho canvo.

Evel ar Verc'hes o c'hober canvo he Map,
Cri a vije ar galon na denje da dristad ;
Da dri dez goude a ressusitas, a teuas d'he c'havet :
Laret-hu d'in, ma Map, emezi, pelec'h ez oc'h bet ?

O tiguierin dor ar Barados, ma Mamm baour, emezan ;
Quemend oa en ennui a meus int lemet a boan.
Laret din, ma Map, m'ar peus digoret pors 'r Barados,
A c'hui c'heus serret porjo an ivern clos ?

Salocroas, emezan, evit-se na meus quet gret,
Car ma carfe 'r bec'herien donet goude da laret :
Pa na neus nemet eur plas red veo bean salvet,
Hac a souilfen, 'r Barados, ma Mamm, gant ho fec'het.

Ma Map, et d'ho Parados gant 'r re peus salvet
Hag em lezet er plas-man vit goelan bepret ;
Gant an dour deus ma dioulagad me ho guelec'ho quer net
Da vont ganec'h d'ho Parados vit n'ho condamfet quet.

O ! neal, Mamm baour, me n'ho condamnan quet ;
Mes n'allan quet pardoni ar re na c'houlont quet,
An diaoul ho deus choaset vit conductor de-se
Ha ma chomfont gant-hant queit a vezin Doue.

Abalamour d'ar leis peus tenet ha changet 'n ho coad
Pardonet ar pec'her, en laquet en hent mad;
Mari zo quen ordinal evel a red an dour,
A c'houlen gant he Map vit ar pec'her sicour.

Neuse oe digasset Gabriel deus an Envo,
Vit annons da Vari en pes de a varvo;
Me sonje ganin, Mari, pa moa ho c'hanaveet,
E vije eur vuez joaus o pije conduit.

Ha nemet poan hac annui, o Mari ! a peus bet;
Na c'houi ve contant breman da dilezel ar bed?
Evit dilezel ar bed-man me na ran quet a cas,
Ha sonjan bars er pec'her me me nec'hamand bras.

Ho Map zo quen caranteus hag ho car quen parfet,
Mari, n'ho refuso quet mar en goulennet.
A c'hi o font var he daolin hag o laret dean:
Me zo contant da vervel vel ma plijo gantan.

An Ebstel egaret er c'hantonio dia-bel
Tout e voeint disparuet en toues eur gouabren.
Mar antrejont en eur sall, gant eur miracle quer bras,
D'assistan maro Verc'hez, tout, nemed zant Thomas.

Thomas a oa et d'an Egypt hac a zo bet rentet,
Hag en tre peder feson en Jardin Olivet.
Lec'h neus guelec' he Vestr o c'houezan an dour ar goad;
Consideromp, christenien, eun dra quen admirabl !

Eus o laret ar goms-man, oh ! mar c'heus bet clevec
Eur voez a oa quer ravissant ! tren ar croec'h deus sellet,
Deus guelec' ar Verc'hez Vari 'font en compagnez
En compagnez he Map, ar Zent hac an Elez.

Hag hen o commans da grial : O ! c'hui, Guerc'hez Vari,
A zo achu, er bed-man, ho poan hag ho annui,
A c'hui a rentfe eur retret d'ho servijer Thomas
A renko soufr 'r bed-man, quent vit mervel, poagno bras

Ar Zent hac an Ele, a zo bet arretet,
O Guerc'hez, Mamm a druez ha Mamm Salver ar bed,
Evit rentan eur retret d'ho servijer Thomas
Ma deus lest da goean eur gouris satin glas.

Pa sao, Thomas ac'hane trezec ar bez eo et
Pa n'arias en tal han neus he vreurdeur caet :
Savet alessé, ma breudeur, a casset 'r c'hanvo-ze
Car ma voelfet quen Mari pelloc'h barz er be.

O ! te, emezin, Thomas zo eun den incredus,
Te na gredez quet ive eo ressucitet Jesus
Quen a oa dit touch deus he bemp couli ;
Breman gredes quet are man er bez-ze Mari.

Permetet guenin, ma breudeur, ma vo digoret ar be,
Na neus netra facilloc'h evit ar guirione,
Pa eo bet digoret n'euz cavet er bez-man
Nemet eun incel bet ouz he lienan.

C'hui 'ta, Guerc'hes Vari, zo curunet er gloar
Hac a hall breman laret n'ho c'heus quen a c'hlaç'har :
O salocroas, emezi, evit se ne n'hon quet
Me n'hon quet hep glaç'har na biscoas nez hon bet.

An dez ar varn general ma c'halon lavar din
Ne meus bet biscoas mui a velanconi,
Evit ens clevet clemo a re daonet
O c'houlén digane sicour ha ne c'hellin quet.

FIN.

Pedet oil christenien, pedet Salver ar bed
Evit nep a neus evidoc'h ar guerz-man copiet ;
He anquen a zo bras, pa n'al cousquet na dez na noz,
Gant eur procès maleurus na lais dean nep repos.
Pedet 'ta evitan, vit ma vo dilivret,
Ha bezet sur de dro biquen n'ho ancoueo quet.

(Propriété.)